

GUERZ GWIRION KATHEL GOLLET

167

Kendalc'h ha jin.

TON : Kantik an diaoul mud.

676

1

D'an noz goude m'oa tremenet,
En ti ma rentaz he spered,
O tra skrijus! edoug an noz
Ne c'hellas den ebet repoz.

2

Kement skabel a oa en ti,
An arrebeuri, al listri,
A ioa taolet ha distaolet
Gant eun trouz estlamus meurbed.

3

Plac'h all an ti, savet mintin,
A welas e kreiz ar jardin
Evel eur vaouez o leski
E kreiz an ti en dro d'ezhi!

4

Neuze ar plac'h strafilhet bras,
En eur grena al lavaras:
« En han' Doue e c'houlennan
Piou aze zo e kreiz an tan! »

5

Ar vaouez paour a respontaz,
En eur lenva e lavaras:
« Me eo Kathel, an danserez!
Ha deac'h c'hoaz ho kamaladez

6

Kondaonet oun gant al Lezen
Da boaniou skrijus an ifern —
Va dourn en doa gret ar pec'hed,
Ha va zeod en deuz he nac'hel!

7

Gant Mari Madalen oun bet
Beteg daouzek gwech kelennet
D'ober eur gwir govesion,
Hag ec'h assure d'in pardon.

8

Eur morian du, kriz ha lostek,
Estlamm gant e dreid krabanek,
En eur c'hourdrouz terri va fenn.
En deuz serret va ginou krenn!!!

9

Malloz d'ar gwall gompagnunez,
D'ar sonnerien ha d'an nosvez!
Malloz d'an dans, d'an assambleou!
Zo bet kiriek d'am pec'hejou!

10

Na bedit ken 'ta evidon;
Me zo en ifern, daonet oun!!!
Stlejet oun, siouaz! gant Satan
Evit leski e kreiz an tan. —

11

Klevit, kristenien, klevit piz,
Pep pec'hed kovesait hardiz;
Ma sentit ouz an drouk-spered
E-giz Kathell c'houi vo kollet.

Echu.

An histor-ma, tennet euz leor great gant an Tad Delrio, a zo gwir hervez leor an « Exercisou Kristen », hag a zo bet c'hoarvezet e bro an Indez sao-heol, e kear Itara, er blavez 1560. » — Dre-ze lakit doun ar gentel en ho kalon.

GUERZ GWIRION KATHEL GOLLET

TON : Kantik an Diaoul.

167

12

E mestrez vad ha truezus,
Pa velas e stad ankenius,
A lavaras d'ezhi: « Kathell
Merc'h ker, red eo mervel.

13

Sellit piz en ho koustians,
Ha kovesait hep dismegans
Evit ma vo kaer hoc'h ene
Da vont dispount dirag Doue.

14

Galvet e voe eun Tad santel
Evit dont da welet Gathell;
Kovez a ra ar glanvourez,
A jom atao leun a enkreiz.

15

En noz goude ma koveseas
E welas eur sklerijen vras!
Goude-ze eun introun e gwen
A gomzas out-hi evel-hen:

16

« Va selaouit, paour keaz Kathell,
Echu ho puez, red eo mervel!
Ha me eo Mari Madalen,
Alvokadez ar bec'herien.

17

Kovesait c'hoas, hep mank ebet:
Rak eur pec'hed ho peuz nac'hel!
Taolit kuit ar pec'hed kuzet,
Pe ' autramant e viot daonet!!!

18

Klask a rear an Tad a nevez
Evit kovez ar glanvourez;
Mes e zeod a zo liamet
Gant an diaoul-mud, var eur pec'hed

19

Setu d'an taol a hanter noz
Pa ne c'hell Kathell repoz,
E tistroas Mari-Madalen
Da gomz c'hoas out-hi evel-henn.

20

« Oh! Kathell, petra ' peuz gret?
Eur gwal bec'hed ho peuz kuzet!
Nac'hel ho peuz an ampoezon
A vo kaoz d'ho taonasion.

21

Antronoz araok goulou de
Tad e ene ' deu adarre
Evit rei d'ezhi an nouen
Hag eun diveza absolven.

22

An Tad o tont ebars an ti
A lavaras a-grenn d'ezhi:
« Ma n'eo dizoursi ho spered
Dizamit-henn hep aoun ebet!

23

Lavarit frank, hep nac'h netra;
Deut eo an termen diveza
Taolit evez... hastit affo...
Araok eun heur c'houi zo maro!!!

24

Eur vech c'hoas Mari-Madalen
Zo digwezet en he c'hichen,
Ha deuz ar c'hostez deou d'ezhi
Evel-hen e komzas out-hi:

25

« Kathell, c'houi siouaz! ho peuz gret
Eur pec'hed vil ha milliget!
Kovesait-henn gant keuz parfet,
Ha me bromet e viot salvet! »

26

Mes azioc'h d'ezhi, en tu kleiz,
E tilammas eul loan direiz!
E zremm e-giz eur siminal,
E dreid 'vel re eun aneval.

27

En e zorn e ioa eur c'hleze
Savet dirag penn ar plac'h-ze:
« Ma kovesez, me d'ha lazo!!!
Ma ne rez ket, me d'ha garo. »

28

Spountet neat gant an droug-spered,
Gathell a varv en e fec'hed!!!
Ha mont a rank dirag Jesus
Gant e beac'h pounner ha mezus!

(Da ganderc'hel)